

## YANNIG AR MIL MICKER

Me eo Yannig ar mil micher.

Me eo Yannig ar mil micher.

Anavezet gant ar vizer

Hop, hei, tra lalala

Tra lalala

La la la la

La la la la la !

- 1-Brudet dre holl war an douar,  
Biskoaz n'em eus kavet va far.
- 2-Eur vestrez koant am eus kavet  
Mont ran alies d'he gwelet.
- 3- Neuze eur c'horn barz ma genou  
Me gomz ~~zli~~ d'ezi eus ma madou.
- 4- Me 'm eus eur c'hogig hag eur yar,  
Eur garrigell hag eur c'hoz karr.
- 5- Eur c'hi, eur c'haz hag eur c'haorig;  
Gwell chafis ne gavi ket plac'hig.
- 6- Setu aze roll ma madou;  
Klevit bremañ ma micheriou:
- 7- Me a zo kloc'her ha sakrist,  
Butuner mat ha lonker chistr.
- 8- Kemenerig, kozeer flour  
Ha miliner laer 'vel an dour.
- 9- Kere oun c'hoaz ha boutaouer,  
Dibuner neud ha pilhaouer.
- 10-Marc'hadour moc'h, marc'hadour saout,  
Da laerez kezeg oun eur haout.
- 11-Barner hag archer oun ive,  
Pa ne c'haloupan araok-e.
- 12-Pa fell d'in beva eus ma rent,  
Me glask ma boued a-hed an hent.
- 13-Eus a belec'h 'ta Marivon  
Ho pe gwell fortun egedon.

Koulmig Arvor.

Suivez notre cours de breton par correspondance - Lisez "Bleun-Brug" notre revue en langue bretonne - Pour tous renseignements écrire à V. Seité, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.